

92

PAOTRED KOZ PLOUZALL.

92 Bis

PAOTRED KOZ

PLOUZALL

GREAT GAND ANN AOUTROU F. P.


Poullaouec

Kuz Landerennek
Barz Sant-Gwenole.



D I N E R S . P È R .

PEMP GWENNEK.




E BREST

EUZ A IMPRIMIRI J. B. LEFOURNIER HENA, RU VRAZ, 86.



1860.

PAOTRED KOZ PLOUZALL.



E Breiz-Izel, gwechall, pell a-dre kein ar vro,
Oa eur presbital koz enn eur c'hornik distro.
He vegeriou tarzet, a veac'h o choum' a zav,
A guze reuz ann oad dindan bleun ann hiliav;
Gwez envlec'h bodennek tro-var-dro hen chouche;
Diouc'h eunn tu ar mor braz, 'harz he dreid a gouske;
Enn tu all eur menez, he benn sounnik enn ear,
A wele eur ster aour o kas' d'ar mor dre gear;
Dubeed var ann doen, ha gant-ho kant labous,
O c'hournijal bepred ha bepred o c'hrougous';
Gwinien 'hed ann ti, a bep tu da brenestr;
'Tal ann or eur skaounik, eur skaounik vean d'ar mestr;
Chardin c'hloz 'drenv ann ti ha liorzik gwaskedet;
Ebarz ann ti furnez ha dre-oll joausdet.

Chetu ar presbital 'vel her gweled gwechall
Er voure'hadennig goant a oa hanvet Plouzall.
Daou zen koz, gwenn ho bleo, a oa o choum' enn-han :
Ronan, ar persoun mad, ha Daniel breur d'ezhan.
Eun deiz, var levereur, hag hi iaouankik flamm,
Den ebet d'ho maga, maro ho zad ha mamm,
Maro ho zadik paour, c'houeac'h miz leun a zo bet,
Hag ho mammik maro ouz ho lakaad er bed,
Pell diouc'h ann tiik soul oa bet ho c'henta ti,
Var bleg ar vreac'h ho daou ho c'hased d'eur c'hlandi.
Ar persoun a neuze, pa welaz ho ankenn,
Er presbital koz-ze, ma-z-eo louedet ho fenn,
Ho c'hemeraz ho daou, eurus da vez' ho zad
Ha da ranna gant-ho pezik en doa a vad.
Oh ! pez en deuz a vad enn he di, eur persoun,
E woar gant ar gêzis her rann' a wir galoun !
Piou a zo ezoumek ? piou a zo enn ankenn ?
Kaloun ar Pastor mad n'hen dilezo bikenn.
'Balamour da Zoue, tad d'ann emzivadet,
Oue Ronan hag he vreur kenn mad digemeret
E presbital Plouzall. 'Vel-se o rën' pep tra,
Doue 'barz ar bed-man vad ann oll dud a ra.
Kentre, en eur neza, 'n eur gas' ar c'har enn dro,
Eur vagerez vreiziad, kalounek mad ha dreo,
N' heane mui da gana d'ann daou Ælik dinamm
He soun muia-karet, 'vel pa vije ho mamm.
Abred ivez, e skol ar persoun koz ho zad,
E teskjont lavaroud eur ger bedennik vad.

Ouspenn-ze, ar pastor o veza euz ar bed
Ann hent gwell', a grede, a beurz Doue choazet,
A falvezaz gant han, euz a benn ho c'havel,
Kelenni d'ann aoter ha Ronan ha Daniel.
Chetu, pa oant seiz vloaz, ho gweljed dre 'n iliz
A zevri o kana, koantik gant supiliz.
En eur ger, desket mad, échont d'ar seminer;
Hag ho daou dija boaz diouc'h servich ann aoter,
Dreist ann oll glouer all a ziskueze bemdez
Ha muioc'h a skiant ha muioc'h a furnez.
Ann Esperans, 'vel-kent, nag hi-zo touellus!
Nemet hanter hep-ken a choumas dudius.
'Pad ma edo Ronan, leun a spered Doue,
Er c'hed euz ann deiz braz oll dezir he ene,
Epad ma iea araog, he oll fisians enn Env,
Daniel keaz euz he dû a zistroaz a-drenv,
Daniel a zistroaz, hag hen enn hanter hent.

- « Ann aoter, eme-z-han, zo d'ann Ælez, d'ar Zent!
- » Ann hini zo galvet da brezeg' al lezen
- » Dle kaou't nerz ann dero, nann gwander ar raozen;
- » Me zo gwan, siouaz ! Ia, nemet re her santan !
- » Penaoz rei nerz d'ar bobl p'ounn dinerz va-unan ?
- » Nann, nann ! ne ket d'hin eo gorren' ar c'halivr sakr,
- » Ne ket d'hin eo prezeg' eneb ann dud fallakr ;
- » Ne ket d'hin eo miroud ann tenzor euz ar feiz
- » Hep sec'ha va c'houezen nag enn noz nag enn deiz !
- » Ann Iliz hen difen ! Graçou ann Eternel
- » 'N-eur pod pri a golfe ho zaour vad ha santel :

» Evit miroud d'ezho ho c'huez-vad hag ho zaour,
» Eo red eunn ene glân, eo red eur c'halivr aour. »

Enn daill ma kemeran ho histor a-benn-vad,
Paotred Plouzall dija gwenn kann gand ann ôad,
Ar c'hrizou var ho zâl, mez ho c'haloun seder,
O doa kountet ho daou tri-ugent vloaz amzer.
Ronan a oa persoun abaoe tregont vloaz ;
Karet oa gand he dud evel n'oue den biskoaz ;
Eus ann oll e oa 'n tad, ar c'huzulier, ar skouer ;
Evel m'en doa kavet, edo prest da ziuver
He vadik gand ann oll; enn deiz evel enn noz
Kel laouen ha ker skanv e iea da gas' bennoz
D'ar bugel 'n he gavel, d'ar c'hoziad 'n he wele;
Pep mad ha peb ankenn oll d'ann Env e touge.
Daniel ivez, Daniel, goud' ar persoun he vreur,
A oa var ar barrez ann eil den, a gounteur ;
Gouzoud a rea madik al latin, ar galleg ;
Edo mestr-skol, espert ha sagrist diouc'h ar pleg.
'Pad ar bloaz hed-da-hed ez oa hen, atao hen,
Servicher ann ofer'n ha souner ar beden ;
Hag hen, hag atao hen gwalenner ar parkou,
Ha reizer ar baotred dizemt ouz ho zadou.
Red her gweljac'h da-vad bemdez da bred ar skol,
Kant gwech o klaskout penn d'eunn hevelep grosmol,
Dic'hoarz ann den, he zremm a-uz ann oll bennou,
He veud ouz he helgez, krizet he vourrennou !
Oh! piou na grénje ket, var ann distera trouz

Pa vije prim klevet ar paotr-koz o c'hourdrouz' ?
Pe gand eur goumz hep-ken, pe gand eunn taol lagad
E vijent gwelet oll d'ann treust o tiskourbellad.
Eno eur skour haleg trouc'het a-nevez-beo
'Vel kleze Damoklez a rea sevel ar bleo !
A-istribil staget ne zeblante gortoz'
'Vit koueza var eur re nemet ger ar paotr-koz.
'Vel-kent ne goueze ket, rak ar mestr nebeud drouk
A dorre he varrad pa lamment d'he c'houzouk
Gant pokou tomm bero, glac'hariet ho c'haloun.
Kalz muioc'h ker c'hariet goude koumz ar pardoun.

Ma tisken a-wechou ann eur-vad enn douar,
E presbital Plouzall edo deu't, m'hel lavar.
Ann oll deiziou eno a dremene kenn sioul !
Atao ar peoc'h, ar joa, ankenn ebet, nag ioul.
Daniel e pep labour a roe dourn da Ronan;
Bep sul ouz al lutrin e sikoure ar c'han,
Kerkoulz e rê'ar gest. Ronan ivez d'he dro
A rea laouen ar skol pa vije Daniel enn dro.
Bemnoz, el levr-sakr, levr karet gant an dud fur,
Eur penn-histor bennak a rea ho flijadur :
Ruth, o klaskout pennou a-zilerc'h ann eoster;
Mab ann tad koz Tobi, ann Eal he genn-beacher;
Jozeph, he vuhez c'hlan, leun oll a vuzudou;
Kasouni he vreudeur 'balamour d'he huvreou;
He furnez, he c'halloud, 'ti ar roue Pharaoun,
Daoust da vreg ar roue hen taolas er prisoun;

Goude, 'pad ar gernez, he garantez a vreur,
O rei ed ha pardoun d'ar re ne oant nemeur
Din euz hevelep mad goud' hevelep torfet : —
« Me Joseph, eme-z-han, Joseph o poa gwerset!
» Ah ! tostait, va breudeur, pardounet ouc'h pell-zo.
» Penaos e ma ho tad hag ann oll enn ho pro ? »
Eurus, a lavare neuze ann daou c'hoziad,
Neb a woar pardouni d'he vreur a galoun vad !
Eurussoc'h, evel-d-homp, neb a zalc'h d'he vignoun
Hep dleoud d'ezhan biskoas na rebech na pardoun.

O kounta d'ehoc'h ama, kenvroiz, ann histor,
Med euz ar c'haer hep-ken e karfen kaou't envor.
Ha c'hoantek a eur-vad, e lavarfen brema :
« Aoutrou, savomp ann telt, ez oump ker mad amat
Mez allaz ! ann Aoutrou ne glev ket va fedenn ;
Euz a venez Thabor eo red brema diskenn' ;
Hag, hep gelloud mui-ken tanva dousder ar peoc'h,
Da inkrez ar C'halvar e rankomp mon't pelloc'h!

Ar c'hantved diveza, amzerleun a zrougiez,
Enn doa skuizet ann Env gand he oll fallagriez.
Ann douar a verve, a skrije 'tachadou,
(Fresk beo e-ma ze c'hoaz en envor hon tadou!)
Ann oll gand ho anken, er c'hed euz eunn darvoud,
A c'houlenne : petra zo eta da c'hoarvoud ?
Evel tremenidi, o von't gand ann dezerz,
Dindan eun heol tanus ho dizec'h gand he nerz,

Ha diouc'h kri al labous ha diouc'h 'n êzen zouar
A wel d'ouz ar gevred o tostâd eur gwall-varr,
Ar re fur, evezek ouz pep trouz, ouz peb brud
A skigne dre ar vro euz a gemmesk ann dud,
D'ann daoulin o koueza, 'n-em lavare goustad !
E-ma koler ann Env 'uz hor penn o c'hrozad.
Ann daou vreur koz ivez, ebarz ho zi enn peoc'h,
O klevoud a-wechou drouk-ekleo ar zoroc'h,
Kerkoulz 'n-em lavare, oc'h en-em vriata :
Va breur, va mignoun keaz, petra welimp-ni 'ta?
Ha Daniel a rec'he!.... Gouskoude ann amzer
A iea bemdez enn dro, bemdez gand he feun-her....
Kemennet zo *sermant* da Veleïen ar vro,
Ha d'ann nep-piou bennak n'her grai'ket.... ar maro !
Ronan, 'vel-kent, Ronan gant graç ann aoutrou Doue
A gendalc'h mad bepred d'he lezen ha d'he Roue ;
'Vit le d'ar *Republik* ne raï biken ! mervel
A ranko marteze, n'euz forz, ma varv fidel!...
Daniel a nec'h, a skrij o sounjal... oh! n'euz forz!
Goude tremen ar bed ne ket ann Env ar porz?
Na daelou he vreur paour, na lezen griz ar vro,
Netra 'n oll da Ronan ne ra douj' ar maro.
Revuzet krenn en deuz!... Kentre eunn all 'n he leac'h
A zo deu't ; ha Daniel, penn foll, da glask ann teac'h:
Her gwelet o pije, ann enkrez var he dâl,
Hag o von'd hag o ton'd bemdez var aod Plouzâl,
He zaoulagad kildro o vuzul' ar mor braz
Hag oc'h heuil' ar bagou a gase zu ar meaz :

- « Perak 'ta, eme-z-han, n'afemp-ni ket ac'hann ?
» Ar re all oll a ia dre ma klevont embann
» Ar *c'hilloin*, savet d'ar re a vo dizent.
» Re bennek ouc'h, Ronan ; ne rit forz hol lasfent ! »
Hag he vouhez trouc'het a voug enn he woelvan.
« Gra, gra 'vel ar re all, a respounte Ronan,
» Me zo pastor, Daniel, va denved am goulen ;
» Evit-ho, ma ve red, mil vuhez a rofen.
» Kea 'ta, va mignounik, kea da glask' eur vro all ;
» Evid-hon-me, 'leac'h ti, 'm bezo ar c'hoajou dall,
» Gwech ez in d'ann aadjou a guz mad d'ar rec'hier,
» Gwech a-drenv ar menez e kreiz al lanneier.
» Nann, nann, evid-hon-me, Daniel keaz, e neb deiz
» Ne guitain va bro ger, ne zilezin va Breiz !
» Nann da, ne fell ket d'hin e nep-tu, e neb bro
» Keuzia d'ar weredik a chouch hon tud varo!...
» Kenavo 'ta, Daniel ! » D'ar goums-ze ken tener
Daniel enn he galoun muioc'h nerz a gemer ;
Ne fell mui-ken d'ezhan selaou' kri ar gounnar
A laoske, 'vel bleizi, ar c'hearieu enn hegar ;
Ne glask mui-ken sellout, var ar gwagennou glaz,
Ouc'h ar bagou a iea da dreuzi ar mor braz.
« Na penaos 'ta, 'me-z-han, va breur Ronan a gred
» Em be me kenn nebeud a gendalc'h em spered ?
» Oh ! na piou 'ta brema respounte ann ofer'n ?
» Na piou hen frealsfe bemdez da bred ar mer'n
» Ouz he daol he-unan pa n'am gwelfe gant-han ?
» Nann in ket kuit ! Gan-ehoc'h, Ronan paour, e chouman ;

» Hag e rankfen ivez mervel abars nemeur,
» N'euz forz! 'tre ho tivrec'h e varvin, o va breur!...
N'edo mui, n'edo mui ann amzer evurus
E vije gwel't Daniel, ar mestr-skol akedus,
O troukpedi eur c'huil, eur venanen a voud,
Ha, d'ar skanvbennigou a c'hoarz ouz ho gweloud,
O tigas' ker buhan, gand eur zell ûz ar c'hlaz ;
Ar zounj euz he c'halloud, euz ann halegen c'hlaz!
N'edo mui ann amzer, ann amzer e vije
Kel liez dre ann hentjou gwelet ann den Doue
O von't skanv ha laouen, trounset klok he zae zu,
Da gas' eunn aluzen pe eur bennoz eun tu !
Kenavo 'n ti santel! kenavo 'r presbitall,
Kenn mad anavezet gand ar geiz a Blouzall,
Pa zeue ar Pastor, douget da beb ezoum,
Da greski, 'vel Jezus, ar bara enn he zourn!
Kenavo ann ti skol! tremenet ve ar c'hlaz,
'Vel eur gaoued zigor var ann dachennik c'hlaz,
O c'houlloï prim ker prim he neichad laboused!
N'e deus mui a zafar! 'vel maro ar baotred!...
'Pad eur misiou bennak oa deu't, 'giz eur sparfel
A spount diwar he neiz ar haour-keaz turzunel,
Falz pastor ann denved a dêc'h gand heuz out-han,
Den diwoell, d'ann ifern 'n-em werzet he-unan,
Eunn *Intru*, he hano, da choum' er presbital.
Goud' e rankas mon't kuit.... Hag oue gwelet raktal
Bodennou ann hiliav o c'holoï ann treujou
Koulz hag ar skaounik vean a gariet meur ho daou.

Ne glevet mui, enn deiz, nemet all leou-douet
Euz ann dud gwall-bennek a skol ann drouk-spered ;
Ne glevet mui, enn noz, nemet kri ar gaouen
Eleac'h ann himou sakr a ganent kel laouen.

Mez, a c'houlennit-hu, ha Ronan ? hag he vreur ?
E pe gorn tro int eat da guzad ho dizeur ?
Diloc'het euz ho zi 'vit rei plaç d'ann *Intru*
E kerzont dre ar vro euz eunn tu d'ann eil tu,
Ronan o sounj' 'n-he bobl ha Daniel 'n-he vignoun,
Gant karantez ho daou unanet ho c'haloun.
Ar gristennien genta eürusoc'h evit-ho
A gave, pa bedent, besiou ar re varo ;
Hag hi, siouaz ! a rank, 'vit pedi ho Doue
Bemdez enn eul leac'h all sevel eunn templ neve.....
Selaouit ! ar c'horn-boud a voud var ar menez !
Ha Plouzalis, var zav, o klevoud he vouhez,
A-dreuz ar parkeier ha dre ann hentjou doun
Ker buhan, ker buhan e-harz treid ho fersoun
Zo oll dire det. Oh ! 'vit klevoud eunn ofer'n
Na danvez, na buhez, mab Arvor ne espern !
Goulo ann oll dier, serret kloz ann ôriou :
E korn al lannek vraz e-ma'n ofer'n hiriou.
Dija, var eunn dolmen duet gad ann amzer,
Var dolmen ann Druz koz eo savet ann aoter ;
Eur c'houl'laouen 'bep tu ha var ar c'hreiz eur groaz :
Netra ker reuzeudik a welas den biscoaz ?
Eur bodik skao e bleun, ganet e touez ar spern,

Eur bodik skao, tra ken, 'vit disheolia 'nn ofer'n,
Tra ken, nemet koabr du dindan ann Env stignet.
Hogen, ouz ann aoter Ronan a zo pignet;
Daniel zo 'n he gichen, hag ar bobl tro-var-dro,
Var ho daoulin stouet, o pedi 'vid ho bro :

« Aoutrou, Doue an Env, zo ken karet e Breiz,
» Kendalc'hit, ni o ped, kendalc'hit d'ehomp hor feiz,
» Hon beleien, dreist-oll, an hini zo hon tad,
» Ann aoutrou Ronan paour, hor mignoun ar gwella,
» Gant he anken bemdez ha bemnoz o wouela !
» Ia, kentoc'h e varfemp n'hen dilesfemp biken ! »

Ann Hostif sakr, a zav hag e plegont ho fenn
D'adori ; oh ! muioc'h int dizaouzan goude,
Muioc'h int dizaouzan, rak chetu ho Doue
A welont diskennet, sentuz ouz ho c'haloun,
Diskennet euz ann Env, var goumz vad ho fersoun !
Oll, ha braz ha bihan, ha paour ha pinvidik,
Oll neuze hen galvont 'n ho ene birvidik,
Hen galvont, me lavar, giz hen galve gwechall
Ar verzerien genta hag ar gristennien all,
Ar verzerien genta, ann oll gristennien vad
A veze prest, ha prest bemdez, da skuill' ho goad.
Nè ket Bara 'n Ælez, ha var guz kemeret,
A ro c'hoaz sklerijen, nerz ha graç d'ar speret ? —
« Tostaït oll gant fisians, tostaït, va bugale,
» Eus hon ankenn Doue hon tenno hep-dale !
» D'ann dourn a zeu d'hor skoï, rentomp bepret bennoz !
» Bennoz bepred, ha gloar ! betek 'n he Varados ! »

Gwelit! ar belek koz a zo c'hoaz galloudek;
He vouhez a zo krenv, he goumzou kalounek,
Kalounek he goumzou, oh! pa brèzeg, me gleo
He gomzou c'hoaz o von't d'an Env gad ann ekleo.

Da eunn oad kaer a zo n'on deuz aoun rak netra,
'Leac'h hor spounta 'n danger hon chalmi eo a ra;
'Vit Ronan ha Daniel eat ann oad-ze enn dro.
Allas! pa c'hriz ann tâl hag ar penn pa zisto,
Ar c'hein pa rank plega dindan ar blavejou,
Ha pa ve red ar vaz da ren' ar c'hamejou,
Neuze, oh! ne ket mui ar risklou a glaskomp!
Ne ket mui ann dispac'h nag ann trouz a fell d'homp!
Mez kornik ann oaled ha tan mad da domma,
Eunn doën c'hloz, peoc'hus, eur gwele, ann tomma
Evit diskuiz' ar c'horf ker pounner var ann oad,
Evel ar pere'hirin, skuiz o von't var he droad,
A gaf mad arzawi dindan kroaz ar c'hroas-hent!
Pe dindan ar bod spern a zav e pleg ann hent.
Gad ann den paour ivez chetu pezh a c'hoarvez:
Sul-vui e skuiz, sul-vui ma kerz var zu ar bez.
Ann daou goz her sante. Rak se pa valeent,
Hodaou kevret dalc'h-mad, skoaz ouzkoaz 'n-emskorent.
« Daniel, paour keaz Daniel, te hep ken a glemman,
» D'he vreur en eur wouela a lavare Ronan;
» Te hep-ken, va mignoun, a zo din a druez
» Rak nemet evid-hon e risklez da vuhez. » —
» List hon nec'h gan-hen-me, Ronan; krenv awoale'h oun

» P'ho kwelan em c'hichen ; bêt hoc'h-unan kaloun !
» Evid hoc'h-hu hep ken, ar boan a zo garo ;
» Ac'hanoc'h-hu hep-ken ve eur c'holl ar maro !
» Oh ! r'ho miro ann Euv ! » Evel se ann daou vreur
'Neur gemmesk' ho daëlou a zousae ho gwall-eur.
Eul labous o von't kuit euz a greiz ar voden,
Eunn delien o koueza euz a veg ar vezen,
Eur c'huil o safroni, eunn netra var ho hent
A daol enn ho spered eur spount, eunn nec'h divent,
Ha Daniel spoutikoc'h, harpet ouz he vignoun,
A zo dare be-weach da zempla. Ar persoun,
'Vit hen herzel, a rank, m'eo hardisoc'h eunn dra,
Kant gwech aslavaret : « Daniel, ne d-eo netra !
» Ar zoudard a zounj d'hid hag a spount ac'hanod
» Eul labousik n'eo ken o c'hournijal er bod.
» Ai-ta, Daniel, kourach! oump herru hep-dale. »
Allaz! e pad an deiz diwar guz o vale,
Atao var ann enkreuz, atao ann her var-n-ho,
N'hellent morse da-vad gouzoud e pe gorn-tro
E kalfjent ar c'henta nag ar sura lojeiz.
Na kement a anken a zere ouz tud keiz ?
Ha Daniel lavare, o rec'hi gwasoc'h-waz :
« Ma n'int ket deu't hirio, e teuint 'ta var-c'hoaz! »

Dem-dostik da Blouzall, tu ar mor, traon ar roz,
E zo, hanter zisto, eunn tamm gos vilin goz;
Enn hi e talc'hent kuz e-touez ann drez, ar spern,
Ar gwiskamanchou sakr hag oll draou ann ofer'n.

Hogen, harpet he benn enn he zaouarn gant-han,
'Pad eunn nosvez tenval, 'tal eur fulennik tan
Var gornik ann oaled c'houezet divogedus,
Divogedus ann tan, mez he spered rec'hus,
Daniel keas, o sounjal bepred enn he wall-eur,
A zelaoue a bell an trouz a rea he vreur
O von't var he oll diz da weloud eunn den klanv.
« Goude ar glao, ann heol, goude ar goanv, an anv,
» Mez p'heur evid-homp-ni, goude kement a reuz,
» E tistroio ar peoc'h?... Ha da c'hedal ez euz
» E tistofe biken?... Ronan, o Ronan paour,
» 'Pe-leac'h 'n euz da gaset, oh ! da galounik aour ?
» Ia, da galounik aour, sakr evel ann traou sakr !....
» Ha ne dlies-te ket, eneb ann dud fallakr,
» He miroud o c'houm' sioul ama gant hon Æl-mad,
» E leac'h mon'd enn daill-ze da-unan d'he gwerzad?..
» Mez Ronan zo pennek !.... ne briz ket he vuhez!..
» Out-han-unan hep-ken n'en deuz morse truhez!....
» Da viana...m'en dije va les't da von't gant-han !....
» Mez, pe seurt vad, siouaz ! 'm-bije-me great d'ezhan?..
» Aoutrou Doue ! c'hui eo ann hini ar gwella
» A hell, var he zever, her ren', her skoazella....
» O Gwerc'hez benniget, ken mad d'ho pugale,
» M'ho ped.. !» N'her c'hleve mui, pell a oa, o vale ;
Ha dija marteze, eunn dra kalounekeat,
Ha gand hirder ann-noz he valven pounnereat,
Edo Daniel e-taill d'en-em roi d'ar c'housked....
Kentre : « Ar zoudarded ! tiz, tiz ! ar zoudarded !

» O klask' ar Persoun 'maint! Klevet o deuz e choum
» E milin goz Kervor.... Gwad! gwad! o deuz ezoum !
« Oh! tiz! » ha kerkent kuit a doull an ôr eo eat
Ar gwall-gelaouer-ma... Daniel a zo var-neat
Mantret gant he gelou; klaskout a ra sevel ;
Falloud a ra d'ezhan prim tec'hat; mez evel
Maro he zivesker! koueza ra d'ann douar
Stok he gorf, ha nemet dre boan ha dre c'hlaç'har
Ec'h hell dre al leur-zi 'n-em stleja d'ann trenjou.
Savet, er-fin, 'n-he zav, e stign he gammejou,
Ha chetu hen, mar gell enn hent, ann denik keaz!
Dira-z-han eur c'hoad doun 'n-em astenn var ar meaz;
E-touez ar gwez eno, e-kreiz duder ann noz!
Ha kaou't a rei kuz-mad? Mon'd a ra ann den koz!
Mou'd a ra, mon'd a ra, ne zant mui-ken ann oad!
Iaouankeat eo Daniel, ha gant her tram' ar c'hoad
E ia, e ia... Allas! kerkent e teu 'n he benn
Ar zounj eus a Ronan! Ar zounj-se hen dalc'h krenn
Var he hent! ne gred mui mon'd larkoc'h! « Na piou 'ta
» Tre daouarn ann dud kriz, ken kounnaret out-ha,
» A viro na gouefe?... ha ne ouzont-hi ket...?
» Oh! ma helfen-me!... Ia, ne v'anavezint ket...
» 'Vit Ronan ec'h hellont va c'hemeret... » Kentiz
Diwar he hent Daniel a zistro var he giz.
Ma tec'haz kuit gant poan, e teu enn dro goud eur :
Rak petra ne hell ket eur garantez a vreur?
» Ia, 'me-z-han, ma varvan Ronan ne varvo ket!
» Gant-ho bremaik ama me a vezo paket,

» Ha Ronan vo pare!... aze 'ma he zae zu...! »
Hag hen, evit he c'haou'd, kerkent da glask' ann tu
'Kreiz ann dinvalijen, a grën hag a zastorn,
Etouez ar spern, ann drez, a zav e pevar c'horn
Ar vilin goz. P'en deuz he c'havet, pebez joa!
Ken difre he-unan he lak' var he ziu-skoa...
Hogen, re veac'h, siouas! re veac'h 'n euz kemeret,
Hag ez eo, skuiz-marro, e toull ann tan kouezet.
Choum' a reaz er stad-ze betek ann hanter-noz :
« Va Doue!... va Doue!... grit d'hin monet d'ho Parados! »
Ar gaouenned hep-ken, laboused ann Ankou,
Var he dro 'bep mare a iouc'he... hou!... hou!...

Pa oa ann heur sounet gant kloc'h an iliz veur,
E tistroe Ronan d'ar gear da glask' he vreur,
Ronan ivez, Ronan 'veza klevet ann hu,
Ouz paotr ar Veill-nevez 'n oa troket he zae zu,
Hag e-taill dic'hizet, a zaouarn ann dud lik
Gand sikour he Æl-mad 'n-em dennas kempennik;
Evel Daniel e-doug ma iez d'ar c'hoad dero
Ar zoudarded 'n he di o doa peur c'hreat ho zro,
Hag eat kuit goude-ze. Koveseat ann den klanv,
Astreuzet ar menez, Ronan, rec'hus mez skanv,
O ton't gad ann hent treuz, n'en doa ket brasoc'h mall
'Vel da c'houzoud petra oa bet e-tro Plouzall.
Nemet gand he vreur paour bepred en devoa neac'h :
« Oh! ma n'euz ket sounjet da gemeroud ann teac'h! »..
« Daniel!... Daniel! 'me-z-han, digwezet 'treuz ann ôr,

» Netra 'n oll d'he stanka, ha leiz he ment digor,
» Daniel, va gwir vignoun, me, me va-unan eo !
» Me va-unan, da vreur!... out-te c'hoaz ama beo?...»
Den ne respount. Allas! evit ober ann droug
Nebeud amzer zo red d'ar re a ia var zoug
Gand ar sperejou fall! A-veac'h ma oa eunn heur
Tremenet, aba oa tec'het ho c'henvreudeur,
Re all ker gwaz hag hi, ma ne oant ket gwasoc'h,
Euz ar c'hoad difourchet, ouz bleizi henvelloc'h
Eget ouz kristennien, a zo bet dilammet
E kreiz ann ti. Daniel gant-ho a oue sammet,
A oue sammet, he dreid d'ezhan hag he zaouarn
Chadennet didruez gant chadennou houarn !
Gant soutanen he vreur enn daill m'edo gwisket,
'Vit ar Persoun da-vad (ha n'hen disnac'he ket)
Edo digemeret gand ar pennoù diwoell. —
« Daniel!...ah!Danielkeaz!...» Chetuhint! 'maint ket pell!
Ho c'hlevet en devez, ho c'hlevet mad o touet :
« Ar maro! ar maro d'ezhan! d'ar belek louet!»
Ronan ne ziskred mui : « Nann, nann, eme-z-han, nann
» Daniel, e-leac'h d'hi-me, varvo ket, mar gellann!»
Hag e ia var he diz da Blouzall d'ho diarbenn' :
« Me Ronan, em'-ezhan, me ar persoun penn gwenn!»
N'oa ket peur-lavaret, e kouez gwall bistiget
Gand eur voul enn he skoaz 'berz ann dud milliget.
Daniel 'n deus her gwelet o koueza enn ho wad,
Hogen, hep he anaoud. — « Ann houc'hed-gwez d'ar c'hoad
« Ai-ta! d'ehomp-ni hon tro! Ai-ta! paotred Arvor!

» Ann houc'hed-gwez d'ar c'hoad! ar mor houc'hed
[d'ar mor!]
» D'ehomp-ni ar gristennien! d'ehomp-ni hon tad timad!»
Pan! pan! « Ai-ta!» pan! pan! Redek a ra ar gwad,
Tud Arvor a c'hounit tud kear a zo gwastet,
Gwell vije bet d'ezho bez' er gear o kousket;
Tri anezho a choum marv-mik var ann dachenn.
Daniel zo enn ho zonez hanter varo a-grenn,
Hanter varo gand spount, he dreid hag he zaouarn
O toug' he chadennou, he chadennou houarn.
He zae zu ra kredi, roken d'he gen-vreudeur,
Oa hen ho gwir fersoun; mez, o pebez dizeur!
Daniel, pa zivorfil, a c'halv he vreur Ronan,
Hag en-em ro d'ann oll da anaoud he-unan....
Potred kear, var ho hent, a lavare 'n ho roll :
• Unan a zo d'omp-ni, m'eat egile da goll,
» Ha n'eo ket marteze ar falla eo hol lod! »

Daou zevez goude-ze, diskennet var ann ôd,
Daniel, he vaz 'n he zourn, o c'hedal bag da zon't,
A lavare : « mall oh! mall eo gan-hen-me mon't
» Kuit a Blouzall!... Plouzall, n'e deuz dalc'h ebet ken
» 'Vit ma c'halounik paour rannet gad ann anken !...
» En tu all d'ar mor braz me iël', ma plij gant Doue,
» Da wouela, da geuzia d'ar gwella mignoun 'm ouet!...
» Va-unan gouskoude nemet her savetei
» A glasken!... Ar Pastor eo zo eat gand ar blei!...
» N'euz choumet nemed-hon, me va-hunan hep-ken,

- » Me va-unan, siouas! da vervel gant anken!...
- » Lazet va breur gant-ho! gad ann dud milliget!
- » Hep ma c'heljen lakât enn douar binniget
- » He relegou santel, dizounjet gad ann oll!...
- » Pe vern eta d'hi-me 'peleac'h gwouela? na koll'
- » Eur vuez a zo deuet da veza ker c'houero?
- » Pe vern d'hi-me va bro, nag he c'hoajou dero?...
- » Nag he meneziou hir? oh! nag he foenneier?...
- » Ken-nebeut ann ofer'n 'barz en he lanneier?...
- » Nag ar sterik a ruill d'ar mor he dourik aour?
- » Ann traou-ze oll pelloc'h a zo d'hi-me dizaour!...
- » Ronan eo a garien!... Ronan, var he zaoulin
- » O pedi gan-hen-me euz ann noz d'ar mintin!...
- » Ronan ha me hon daou, paour keaz emzivadad,
- » Neb disparti 'tre-z-homp aba oamp var ar bed,
- » Dispartiet brema gant kement a grisder!...
- » Marteze da viken!... O bro leun a c'houervder!
- » Nann, ne va dalc'hi ken!... Ne garan mui netra
- » Var da zouar ruziet gant ar gwad ar pura!...
- » Kenavo!... Kenavo!... Ah! Plouzall kenavo!...»

Daniel a bleg he benn; o c'hedal skuiz maro

Kement hag o wouela, ec'h azez var eur roc'h.

« Don'd a rei', eme-z-han, ne zaleo ket pelloc'h... »

A boan en deuz koumzet eur vag a zouaraz,

Ann hini a c'hede gad eunn hirrez ker braz.

'Vel m'en deuz he gwelet, Daniel, daoust d'he gozni,

Enn he zav kel laouen a zo pignet enn-hi;

Ha kerKent emA kuit. Ann avel a boulze
Var zu an enizi : hogen petr' a ra ze ?
Ann avel a boulzo 'leac'h ma plijo gad Doue.
Daniel c'hoaz a wouelaz, ha goude c'hoaz e oue
Klevet he genavo, he genavo divea!
A zoug gad ann avel, a-berz Doue, ez ea ;
Hag eunn heurik goude n'her gweled mui. Ar mor
Enn eunn taol kounnaret, var rec'hier ann Arvor
A ieonenne. — « Daniel, Daniel paour, e pe leac'h,
Emout-te? » — Hag ann dud, e gwir abek d'ho neac'h,
A lavare d'ann noz : « O Itroun Rumengoll,
Gwir Vamm hor bro, mirit n'afe Daniel da goll! »
Neb den ne vez morse enn-aner herbedet
D'ann Itroun Varia, Mamm vad ar Vretounet.
Chetu enn gwirionez, 'benn ann eil antronoz,
Hep drouk na glaz, Daniel a lavare bennoz
D'ezhi, o touara var bro ann Normandi.
Eur c'hristen mad eno, he-unan enn he di,
A reaz digemer kaer d'ezhan da ziskuiza :
« Deu't ouc'h enn-hanv-Doue, 'me ann den mad d'ezha,
» Enn-hanv-Doue ivez brema c'hui a choumo
» Da veza ken-vreur d'hin betek ma vin maro. »

Enn daill ma ia 'n amzer devez goude devez
Enn dro, miz goude miz, blavez goude blavez,
Var gement a reusiou a drubuillas ar Frans
Doue 'r-fin reaz luia devez ann dilivrans.
Dre wir he vertusiou dija Napoleon,

Koulz hag a berz Doue, oa pignet var ann tron.
Gant han 'teuaz ar peoc'h, var lerc'h ar *Republik*
A oa, o suna gwoad, o suna re, marv-mik.
Ar bobliou ho-unan, penn-da-benn gand ar vro,
A c'halve kalounek ho beleien divro
Ann ilizou, serret re bell oa, a zigor
Dre urz ann Impalaer, dreist-oll e bro 'n Arvor.
E pep leac'h ann eur-vad, al laouenedigez
A ra d'ann oll renta graz ha meuleudigez
Da genta d'ann Doue mad zo hep-ken galloudus,
Ha goude d'ann hini a oa kenn akedus
Da rei d'ann oll ho gwir, ha d'ann oll ho mennat.
Daniel ivez, Daniel diskuizet eur pennat,
Evel eur vleunen c'hoanv lekeat he zreid enn dour,
Enn he gearik nevez, 'ti he vadoberour,
A zant eur beoder all o sevel d'he galoun.
Ar zounj euz he vamm-bro, ar zounj euz he vignoun,
Her gwelout marteze beo, beo c'hoaz e Plouzall,
A laka enn he greiz he galoun da zridall.
Bemdez, bemdez pa iea da vale var ar meaz
E seblante d'ezhan klevoud he vreurik keaz
Ouz her gervel da von't, oh! da vonet hep-mar
Da skuilla 'n dour zantel var he gorf en douar!
Ne bâd mui; partial a rank!... Eunn abardaez
D'he vadoberour koz, e tal ann tan, el laez,
E lavar, ann daelou puill enn he zaoulagad,
Puill he zaelou ha druz gand anaoudegez vad :
« Ho kuitâd a rankan, va zad, madoberour;

- » Va c'haloun ne zalc'h ken! E Plouzall, 'tal ann tour,
- » E fell d'hin kaou'd va bez, va bez eno kevret
- » Gand hini va breur paour, bez Ronan er veret!
- » Oh! ma plij gant Doue, kenn mad d'he vugale,
- » Betek Plouzallik c'hoaz me a c'hello bale!
- » Eunn dra hel lavar d'hin, me gred ez eo ann Env : —
- » Ne zale ket pelloc'h, Daniel ! » — Hag eo ker krenv
- » Ar vouez-ze em c'haloun ma-z-eo red d'hin senti!
- » Pedet 'm euz ar Werc'hez, fizianz em beuz enn-hi.
- » Kenavo 'ta d'ehoc'h a lavaran, va zad.
- » Ha kant mil bennoz d'hoc'h evit ho kaloun vad! »

Antronoz, mintin mad, pell araog goulou deiz,
Daniel, tra ma c'helle, var zu he vro, ar Vreiz,
Krog enn he bennik baz, heb gwel't hirder ann hent,
Ha iea, enn he galoun eur joa dic'his, divent.
Ar re her gwel o von'd a lavar gant estlamm :
Da beleac'h 'ta e ia ar paour keaz koz a-lamm ?
Da Blouzall e tistro ! ho! nep a gav estonn
N'e ket, evel Daniel, ne ket ganet bretoun;
N'en deus ket bet ann eur, azalek bugaleach,
Da zaouri ar c'huez-vad euz ann ed-du, beveach
Ma rear, epad ann anv, eur gammed var ar meaz ;
Oh! ne woar ket petr' eo beva gand iout ha leaz!
Ne woar ket pegenn kaer ar bleun bruk er menez,
Nag al lann alaouret ne zivleunvont jamez.
Bale ra 'r gwir breiziad ! bale, ha bale c'hoaz !
Diouc'h ar skuisder pell-zo ha diouc'h ar boan eo boaz.
Chetu dija, var benn ann dekvat abardaez,

Chetu hen, laouen braz, digweset e Keraez.
'Pad eur goulou, eno ec'h arzawaz. Hogen,
Daou zevez goude, oh! dija n'helle mon't ken !
Daou zevez goude-ze, hag eur penn devez all
Chetu Daniel, er-fin, chetu hen var Blouzall!....
Hag eunn huvre ez eo? eunn huvre touellus ?
Nann, nann! tra anat eo! sounet ann *Angelus!*...
Daniel, evit meuli Merc'h ann Oll-C'halloudek,
A stok enn douar iën he zaou-c'hlin anaoudek
Goud' e sell dira-z-han, goud' e sell var he dro :
Ia, hen hount ar menez, hen-hez ar c'hoad dero,
Hag aze ar mor braz kousket var ann treaz gwenn.
Sec'h da zaëlou, Daniel, hag arsav da ankenn
Mar ez peuz c'hoaz. Sell mad! oh! ne veles-te ket
Re goz ha bugale, oll enn ho c'haer gwisket,
O tougen' bokedou ha skourrou glaz 'n ho dourn?
Bokedou skourrou glaz deut' c'hoaz var lerc'h ar skourn!
Selaou! Ne gleves ket o souni ar c'hloc'hik
Ez peuz kant gwech sounet var bouhez da vrec'hik
Gwechall, evit gervel ann dudou d'ann ofer'n?
Ai-ta, Daniel! ne mui e-touez ann drez, ar spern,
E kreiz ar c'hoad dero, nag e korn al lannek,
'Ma savet ann aoter hirio gand ar beleg;
Hogen er gwir iliz, e gwir iliz Plouzall,
Hirio, d'ar wech kenta, goud' eunn amzer ker fall,
Digor d'ar garantez, d'ann esperanz, d'ar feiz
Beo birvidik atao choumet e kaloun Breiz.
Var zav 'ta, Plouzallis! it da gan' adarre

Ar meuleudiou santel gand ho skourrou lovre!
Daniel a zav ivez, kerkent hag ar re all,
Ha var ho lerc'h, a-dreuz parkejer glaz Plouzall,
E ia, oh! 'n-eur grena, oh! ker skuiz ann den koz
Bemde-c'houlou enn hent ha brema doug ann noz,
E ia gouskoud', e ia gant hast ha mall er-vad,
Var zu ar vourc'h, eur bod, eur bodik a c'houez-vad
Gant-han ivez 'n he zourn da drugarekât Doue
Ha gand he oll vreudeur da gem-meski he voue.
P'edo var al leur-gear ann divea galv a zoun,
Hag ar bobl enn iliz dija c'hed ho fersoun
Da zon't ouz ann aoter. Daniel n'eo bet gand den
Gwelet oc'h antreal; bez' eo choumet adren,
Var he zaoulin kouezet kenta m'eo eat ebarz...,
Kentre, eur paotrik skanv a zeu, hag harz-e-harz
Var he lerc'h, eur belek, ouz kreiz ann aoter veur
A bign dre boan.... Daniel 'n deuz anaveet he vreur!...
« Ronan! va breur Ronan! beoc'hoazdrec'hrag ann Env! »
P'en deuz her gwelet, oh! ne chom mui enn a-drenv,
Hogen var nich ez a, var nich dre greiz ann dud
A zo saousanet oll gand henveleb burzud.
Oc'h ober d'ar paotrik tec'hout prim var he giz,
'N'he leac'h, 'harz treid Ronan, ec'h em-laka kentiz.
Ar belek koz dievez ouz ann traou a dremen
Enn dro dezhan, nemet 'n he Zoue ne zounj ken....
In nomine Patris... Mez piou ar vouhez-hount?
Na piou ouz he beden ann hini a respount?
Oh! na Daniel ve?... Ia, her-gwelet en deuz mad!

Daniel, he-unan eo ! Daniel he vreurik mad!....
O Jezus benniget!... ne zalc'h nemet a veac'h,
Beuzet eo a zaelou, astenn' a ra he vreac'h,
Hag ema marteze gand ar joa 'z-he galoun....
Mez hag ann oferen?... O va Jezus pardoun!...
Gouskoude ar belek ouz ann aoter a zav,
Hag ann ofer'n, choumet eur pennat var arzav,
A ia da benn, hogen, e kreiz eur mor a lenv
A skuill ar galounou hag a bign bete 'n Env.
Kanit, Ronan, kanit, var delen aour 'n ælez,
Mil meuleudi brema d'ann Doue a vadelez
En deuz ho pareet c'hoaz eur vech araog mervel !
Konsakret eo gant-han ann hostif eternal ;
Hen adoret en deus, Doue mad he iaouankis ;
Ha peur echuet eo er-fin ar zakrifiz.
Mon'd a ra da bronons, ar c'houmzou diveza,
Distroet ouz ar bobl da rei bennoz d'ezha,
Pa zeu Daniel, skuisoc'h skuisoc'h a heur da heur,
D'astenn' he zourn d'ezhan : « Ronanik, o va breur!.. »
Ronan neuze ne hell miroud da vous-c'hoarzin,
C'hoant en deuz da respount ; hogen, var he zaoulin
O plega dindan han, kerkent ez eo kouezet,
"Tre divrec'h he vignoun. Ann oll a zo souezet,
Ha pa z-edont kentiz 'n-em hastet var ho zro,
Penn-ouz-penn ho daouik, ah! ho c'havjont..... maro !